



751

KLEMGAN PLUGUERNEVE



D'AN OTROU E. OLLIVIER

*Chaloui*

*Rener pe Superior Pluguerneve*

*Person-Kanton Boulvriak*



## KLEMGAN

### SIMINER PLUGUERNEVE

*Maestoso*

Du-hont e Ker-ne me a wel Dis-pag gant-  
han he zious-kel Eun æl uz da Blu-ger ne-  
ve En he zorn deou eur c'hle-ze.

*pe :*

*All<sup>mo</sup> Gracioso*

Du-hont e Ker-ne me a wel Dis-pag gant-han  
he zious-kel Eun æl uz da Blu-ger-ne-ve  
En he zorn deou eur c'hle-ze, E. M.

Du-hont, e Kerne, me a vel,  
Dispag gant-han he ziouskel,  
Eun æl uz da Bluguerneve,  
En he zorn deou eur c'hleze.

Me a vel du-hont en amzer  
A-uz toen ar Siminer  
Eun æl, konnar 'n he zaoulagad,  
En he zorn eur c'hleze ru-goad !

Guechall uz d'an Ty binniget  
Med kano na re an æled  
Darn gand ar beden o pignat,  
Darn o tiskan gant ho mennad.

Med kano na re an æled  
Tre 'n env hag an Ty binniget...  
Kemm zo etre dec'h hag hirie,  
Petra eta zo a neve ?

Eun æl hepken uz d'ar C'hloerdy,  
En he zorn goalen ar gasti !...  
Petra a neve zo digouet  
Pa na gân pelloc'h an æled ? —

Allaz ! Kerne zo en kanvou ;  
Dre ol klemm hag huanadou !  
Evid ar vro pebez diouer,  
Zerret, ziousaz, he Siminer !

Ar Chaloni oa en he benn  
Tolet er mæz vel eun estren,  
Stilejet er porz he veleien  
Ha stlabeet he skolerien !

Didronet ar Mestr, tud fallakr  
An euz rabet war an Ty zakr !...  
Mès daoust d'ar pezh zo war baper,  
D'an Iliz e ar Siminer.



Ia, Doue zo c'hôaz he berc'hen,  
He æl a zo ouz hen difen ;  
Lagad ma fe hen guel en ær  
A-uz toen ar Siminer ;

Du-hont er oabren me hen guel  
Dispag gant-han he ziuaskel  
Hag hen konnar 'n he zaoulagad,  
En he zorn eur c'hleze ru-goad.



I

Aze, etre an daou vene  
(Mene-Du ha Mene-Arre),  
Etre ker Rostren ha Goarec  
Wardro hanter-hent, el lannek,

Aze, war c'horre ar grec'hen,  
Vel pa vije he c'hurunen,  
Ken kaër hag ar c'haëran maner  
E ma zavet ar Siminer.

Picot, Person Pluguerneve,  
'N oa hen zavet gand he zanve,  
Vit ma vije hed an amzer  
Tra an Iliz, tra hon Zalver ;

Vit ma vije Ty ar beden,  
Ty ar furnez, ar sklerijen,  
Da zével ar fe rik ha c'huek  
Ha beleien vit he frezek.

Gret an euz he garg didamall,  
Laket ar vad e lec'h ar fall,  
Zavet da Gerne he inor  
Uz da ol vroïou an Arvor.

Mar na n'oa guechall vit zeien  
Med ar bruk hag al lann melen,  
Breman endro d'han zo koajou,  
Parkou leun a ed ha prajou,

Parkou leun a ed, prajou glaz,  
Koajou bodennek ha gue braz :  
Dre bedi ha dre labourat  
Deuz al lannek 'n euz gret eur prad.


Koulz a zo bet, o Bro Kerne,  
E oa truezuz ho toare :  
Pa dregerne ho saonennou  
Noz-de gant trouz an dizurzou.

Mouezïou spontuz a oa klevet  
Ha toliou garo a oa gret....  
Ar *fallagriez* a rene  
Er zaonen vel war ar mene !

— Elec'h na oa komz a Zoue  
Med d'hen dizakro a vije,  
Deuz an eil mene d'egile  
Klever breman eur c'hân neve :

D'an neve-amzer, o tistôn  
E klever kân ar Basion... —  
Kizou ha komzou ar zabat  
'N euz dilezet ar C'hernevad.

Pa dol en amzer, da zerr-noz,  
He ganaouen ouz troad ar roz  
D'al loar, d'ar stered evit test,  
He ganaouen drant so honest.



Doue e Kerne zo karet,  
Ar zakramanchou zo pleustret,  
Ha mond a rer da bardona  
Da Lourd ha da Zantez-Anna. —

Na piv an euz gret ar burzud  
An euz troet bue ho tud,  
Kerneviz ? — N'e ket eur myster :  
Gret e bet gant ho Siminer.

Bennoz Doue oa gand an Ty  
Ha bennoz ar Verc'hez Vari ;  
Ouspenn, kalon an Tad Maner  
Oa bepred gand ar Siminer.

Beleien zantel deuz ar penn,  
An dibab deuz ar veleien,  
Beleien zantel disket kaër  
A re ar skól er Siminer.

Gret an euz he garg didamall,  
Lakët ar vad elec'h ar fall,  
Zavet da Gerne he inor  
Uz da ol vroïou an Arvor.

Al labour a ra he inor  
Hag a zo ho prasan tenzor,  
Kerne : gret an euz beleien  
Da ren ho tud ha d'ho c'helen.

Zavet an euz d'ac'h beleien  
Hag ive danve eskibien.  
Nag a vanac'h, a visioner  
Kelennet gand ar Siminer !

Na ped ha ped a visioner,  
Tommet ho fe er Siminer,  
An euz hi c'haset da bell-bro  
Hag hano Kerne war eun dro.

Tud-chentil vraz ha bourc'hizien,  
Tud a vrezel, tud a lezen,  
Tud a vadou, tud a vicher  
Zo bet disket er Siminer.

D'ober vad d'an ol oa zavet,  
D'an ol ar vad an euz rannet :  
Ken kaër ha ken kaër a vele  
War bep ine ziel Doue.

Ar micherour an izelan,  
Otrou ar c'hargou huelan,  
Mab an ty plouz, mab ar maner  
Oa keit ha keit er Siminer.

Hag a-bell, a-dost, deuz Kerne  
Ha deuz an diavæz ive,  
E tirede ar vugale  
Da Siminer Pluguerneve.

Amzeriou gaër an euz treuzet,  
Deuz amzer fall an euz reuzet :  
Koulz hag er peuc'h, er goal-amzer  
Dispont an euz gret he zever.

E-kreiz he vrud e oa breman  
Hag en he vleùn deuz ar c'haëran,  
Ouz hen ren en hano Doue  
Eur beleg a Bluguerneve.

Ar guel deuz an Ty-ze re vad  
D'ar galon ha d'an daoulagad,  
An Ty a re d'ar fe er vro  
Nerz ha sklerijen war eun dro.



Aze, war c'horre ar grec'hen  
Vel pa vije he c'hurunen,  
Ken kaër hag ar c'haëran maner  
E ma zavet ar Siminer.

Vel eur skuer hag eun difenner  
Ma uz d'ar vro ar Siminer,  
Ha Kerneviz oa stad en-he  
Gant ho skól-vraz Pluguerneve.

Hirie Kerne zo en kanvou,  
Dre ol klemm hag huanadou !...  
Evid ar vro pebez diouer :  
Zerret, ziuaz, he Siminer !!!





## II

Er blavez c'huec'h ha naontek kant  
(Blavez a reuz hag a zizmant),  
An naontekved a viz kerzu  
Eun darvoud garo zo arru !...



Na oa ket c'hoaz tarzet an de  
Ouz toull an nôr oa otrone,  
Tro-zro zoudarded, jandarmed !...  
Ar Siminer a oa gronnet !

Zoudarded ha zoudarded c'hoaz,  
Jandarmed gant ho c'hleze noaz  
War droad, war varc'h, o vont gant herr  
Da zirodo ar Siminer !

Ar c'hloc'h klemmuz deuz lein an tour  
A c'harme o c'houlen zikour.  
He vouez a oa leun a drue  
Hag a grie : forz ma bue !

Re ar baroz a zizrevel  
Klemmou ho breur, hag an avel  
O vont gant zaonennou Kerne  
A grie : forz, forz ma bue !

Hanter-dihun ha strafillet  
An dud prim-ha-prim a zired...  
— En eur velout ar zoudarded  
Fianz en ol a zo kroget :

Kalon ar mammou a dommaz,  
Breuder, mignoned a dridaz,  
Ha kenkent e teuaz gant-he  
Ol en eur vouez : *Vive l'armée !*

Guir e, ar zoudarded guechall  
Oa ho c'harg mirout ha divoall,  
Divoall ar vro ouz an dud fall...  
Mès breman rant eur vicher all !


Hirie 'n ho dorn a zo eun horz ;  
Hag e tarc'hont gand dor ar porz,  
Hag e tarc'hont war an nor-dâl  
Vel da lac'ho eul loen brutal !

Pep töl dre ar Bourg a ziztön,  
Ha pep töl ive a sko dön  
E kalon an dud glac'haret  
War leuren ar Bourg dastumet.

Kenkent chetu eur griaden  
O skiltro ouz kreiz eur vanden...  
Eun den zo koueet d'an douar  
Maro gand ar spont, ar glac'har !

Kalon an ol a zo mantret,  
Daërou an ol an euz redet...  
Mès an toliou bepred a gouez  
A zön war an nör hep paouez !

Prestig an nör a zo draillet,  
Dindan an toliou puluhet...  
Ar jandarmed a ia gant herr,  
Vel eur brezel, er Siminer.



Na ped ha ped a zo an-he,  
Klezeier, fuzuliou gant-he,  
Eneb eun dousen veleien  
En ho dorn eul Lever hepken,

'N ho dorn Lever ho fedennou,  
Ho chapeled 'n ho godellou,  
En ho c'halon ar garante,  
'N ho geno komz ar virione.

Mouez ar bobl a zav vel ar mor  
Pa zic'hlagh war ojou Arvor,  
Hag a lar gand eur griaden  
He spont, he heuz hag he anken.

D'he zro an nôr-vraz zo koueet  
Gand ar bizier-houarn divarc'het,  
Pe brevet gand an horz ponner !...  
Chetu digor ar Siminer !

Na glever ken med an toliou  
O vruzuno an norjou...  
Vel pa vije er Siminer  
Eun daou pe dri c'hant munuzer,



Vel pa vije er Siminer  
Eun daou pe dri c'hant munuzer,  
Prez gant-he d'ober archedo  
Da zebelio korfou maro !

Ekeit-se sous-prefet Guengamp  
A zav deuz ar gegin d'ar gamp,  
A ia, a zeu 'n eur gaketal,  
A hed an Ty en eur vragal.

Mouez ar bobl a zav a-bouez penn  
Hag a lar en eur griaden :  
« Na n'e ket leal al lezen  
A lem deuz he dy he berc'hen. »

...Chetu o tond ar Superior  
Dre c'heno an nor-vraz digor,  
O tond etre ar jandarmed  
Vel pa 'n ije gret eun torfed !

An dud vad a zo estlammet,  
Gouelo ra kalz a zoudarded...  
Ar bobl, dre zoujans, pa dremen  
A zizolo, a bleg he benn.

Trouz ebet ken na ve klevet...  
Mès daërou an ol puill a red  
Pa zell ouz an Ty da gas d'han  
He gimiad... an divezan !

Evelt-han he ol veleien,  
Stlejet evel torfetourien,  
Hag an eil warlerc'h egile  
Gant jandarmed ouz ho c'hoste...

Mouez ar bobl a zav vel ar mor  
Pa zic'hlagh war ojou Arvor :  
« Na n'e ket leal al lezen  
A lem deuz he dy he berc'hen. »

— Jezuz, hag an euz lavaret :  
« Elec'h a vin me renk kavet  
« D'am zervijo ma beleien,  
« Ha d'am fedi ma c'hristenien »,

N'halle pelloc'h chom he-unan  
Hep golou, hep ezans, hep tan,  
Hep eur galon d'hen adori  
Ha da dommo ouz he hini.

N'halle ket pelloc'h hon Zalver  
Chom'en Ty hep he zervijer...  
— Warlerc'h an eil mestr ar Mestr Braz  
D'he Dy keno a lavaraz !




*He Dy!*... Ia, he Dy da viken,  
Daoust da gomzou ha da lezen ;  
Hen a zo he berc'hen bepred,  
Er mæz nag a ve bet tolet,

E kichen, en Iliz-Paroz  
E ma vel en eur Baradoz :  
Tud kalonek d'hen adori,  
Tud a fe vad d'hen *c'honsoli*.

Eno tud vad Pluguerveve  
A viro, war bouez ho bue,  
Karante leal ha tener  
Evit Jezuz ar Siminer.

Chetu gret eta an torfed !  
Ar Siminer zo dizakret !!  
Ha chetu Kerne en kanvou !!!  
Doue da glevet he c'hlemmou.





### III

Guechall, Kerne, e Breiz-Izel,  
C'hui a dalc'he eur reng huel,  
Ha kaëran lufr ho kurunen  
A oa dreist-ol ho fe gristen.

Neb an oa ho fe adsavet,  
Deuz a bep reuz he divoallet  
Hag he miret ken krenv 'n ho pro,  
Mammen ho fe a zo maro !

War ho touar, Pluguerneve,  
Oa divoanet boked Kerne ;  
Ha martreze n'hen goarec'h ket,  
C'hui e a zouge ar boked.

Na zonzec'h ket pebez inor  
A poa dirak pobl an Arvor...  
Mar oe brudet Pluguerneve  
E dre he Siminer a oe.

Joa vraz oa 'n ho tiegezou  
Pa zigouee de ar Prijou,  
D'ar meurs ha d'ar iaou zoken  
P'arrue tud ar skolerien.

Pa dremene ar vugale  
Dre ho Pourg, o vond da vale,  
Out-he ho kalon a dride  
Evel pa vijent bet ho re.

Didrouz ha trist pad an hanv braz,  
Er Bourg e teue bue c'hoaz  
Pa zeue gant miz ar Rozær  
Ar vue barz er Siminer.



Vad a re klevet, d'ar mare,  
Zôn an *trompillou* adarre,  
Mesket gant mouez ar skolerien  
O vont gand avel ar zaonen.

Ha c'hui, Bourkiz Pluguerneve,  
Aze didorr c'hui a veve ;  
Bara hag arc'hant en ho ty,  
Ia, c'hui a veve dizoursi.

Ia, en diskeud ho Siminer  
Ho pue oa skanv ha seder.  
Mès pelloc'h na vo ken henvel :  
Troket so bugel er c'havel !

Gant he rên hoc'h eurvad zo kouet !...  
Doue eul liam an oa skoulmet  
Tre ho pue hag he vue,  
Vel tre ar c'horf hag an ine.

Na oarer ket, vid ar iec'hed,  
Petra tall, ken na ve kollet ;  
N' anaver mad mend eur veen  
Ken na ve kouet war an dachen.

C'hui hag a oa en dienez,  
Klanvourien ha paourien gez,  
Ho lod a oa e peb amzer  
E ol brejou ar Siminer,



M'ho kuel bodet endro d'an nôr  
Gant hast o c'hortoz an digor.  
Daoust d'an amzer, heol, glô pe skorn,  
Ho pod-pri e pign ouz ho torn.

Pelloc'h ken na pred, na diner  
Da glask ouz dôr ar Siminer !...  
Gouelet, o paourien gez ma bro,  
An dorn ho mage zo maro !...

Kerne zo breman en kanvou,  
Dre ol klemm hag huanadou !  
Evid ar vro pebez diouer,  
Zerret, ziuaz, he Siminer !!





#### IV

'N he zav, dilavar en avel,  
Ouz eur c'horf maro e henvel...  
Hen guelet a zo eun drue,  
Hen zellet a sklas an ine !

Na zired ken a vro Guened  
Nag a Vro Kerne kenneubed,  
A Vro-Hall nag a vro Treguer  
Ar Vugale d'ar Siminer !

— 37 —

Na zired ken warzu an Ty  
Met tud henvel ouz ar brini  
Pa houagont a-leiz ho geno  
O klask lod deuz eur c'horf maro.

Na dosta nemed an dud kri  
Na rant forz e pelec'h krigi,  
Hag a zizpen ar Siminer  
Vel ar Judev zaë hon Zalver.

Daou berc'hen koz zo en dachen  
Vid digemer ar skraberien :  
'N hini zavaz an Ty kentan,  
An hini reaz an divezan.

Dom Picot, e penn ar c'hlazen,  
En he zav-zonn war he zijen,  
Dirak zant Charl hag ar Verc'hez  
War dâl an Ty gant zant Fransez ;


Dom Picot, e penn ar c'hlazen,  
En he zav-zonn war he zijen ;  
Hag er chapel an Otrou Graët,  
He benn er-mæz deuz he arched....

Guechall eur iec'hed a vize  
Guelet an Ty leun a vue,  
Endro d'han gue, bleun a c'huez-vad...  
Ha breman pebez kalonad !

Avel Kerne o tarnijal  
A iud, a ouel er chiminal ;  
A ouel, a damant hep dihan  
E beg ar chiminal hep tan.

Lapouzed an denvalijen  
Lec'h Doktored ar sklerijen !...  
A-hed an noz kouc'han ha toud  
A hop, a hop hag a hirvoud.

Du-hont da krec'h e mant kludet...  
Diwar stern eur veren dorret,  
Truezuz evel eur c'hlemgân  
E tiston dre an noz ho c'hân ;



Truezuz vel eur glemmaden  
E tiston en denvalijen,  
E tiston war ar Bourg didrouz  
Vel mouez an Anaon o c'hourdrouz !


Vel mouez an Anaon o c'hourdrouz  
E tiston war ar Bourg didrouz,  
E tiston war ar vro a-bez  
Vel mouez ar glac'har hag ar vez !

Lapouzed an denvalijen  
Lec'h Doktored ar sklerijen,  
Pebez dizurz, pebez enkreuz !  
Tolet ar guir berc'hen ermæz !...

Kaër a oa gand he zaë c'hlazour !  
En-han vel en eur melezour  
An heol o sevel a zelle  
Mar a oa koant, deuz ar beure.

Na kaër a oa pa lugerne  
Dindan bannou an heol kreiz-te...  
Vel lagad Doue uz d'he benn  
O rei d'han **NERZ HA SKLERIJEN !**

Kaër a oa c'hoaz d'an abarde.  
An heol arok kloza an de



A c'hoante rei d'han, kent kuitat,  
He sklerder gant pok an noz-vad.

Kaër mouez ar c'hloc'h, striz d'he zevel,  
A zone skiltr bep eun amzer,  
Didrue vel mouez al lezen,  
Da gas mestrou ha skolerien.

Kaër oa da velet pad an de :  
Dre ar porjou he vugale  
Iac'h ha joaüz oc'h ebati  
Tre koulz peden ha koulz studi.

Kaër a oa ive pad an noz,  
Sioul ha dizaon war he roz,  
Paket en he vantel-vrumen,  
Tre he zivrec'h he skolerien.

Ken kaër hag ar c'haëran maner  
Oa da Gerne he Siminer !  
Dibod eun Ty ken karadek,  
Dibod bro ken anaoudek.

Dibod eun Ty ken karadek,  
Dibod bro ken anaoudek ;  
Dibod Ty zo kement karet  
Gand ar vugale 'n euz zavet.

Pa zonjer pez an euz koustet  
A arc'hant hag a boan-spered !...  
Dibod ar c'hristen e Kerne  
N'an euz min e Pluguerneve.

Pa zonjer pez an euz koustet  
A garante hag a aket !...  
Dibod ar c'hristen e Kerne  
Ha na gar he Bluguerneve. —

Guech-all eur iec'hed a vize  
Guelet an Ty leun a vue,  
En-dro d'han gue, bleun a c'huez-vad...  
Ha breman pebez kalonad !

Ieod hir war ar guenojennou,  
Drez, linad elec'h ar bleuniou,  
C'huez ar c'hôz, dorjoui tarzet...  
Chetu stad an Ty dilezet !

War he goajou, he zouarou  
Zo vel eur vantel a ganvou,  
Hag Æl ar Guir a-uz d'an Ty  
A led ar spont, ar velkoni.

Lagad ma fe hen guel en ær  
A-uz toen ar Siminer,  
Hag hen konnar 'n he zaoulagad,  
En he zorn eur c'hleze ru-goad.

— Ar re-ze zo frouez difennet,  
Madou gant ho mestr diframmet ;  
Poan ra d'ar galon p' ho gueler,  
Vel pa na vijent ken ken kaër !

Poan ra d'al lagad ho zellet,  
Madou gant ho mestr diframmet...  
Mès Doue zo c'hoaz ho ferc'hen  
Hag a vo, daoust da bep lezen.

Kaër a vo klask digareou,  
Livo lezen ha lezennou :  
Kement ha lac'ho an nissan  
E lemel he vir digant-han.

Na n'e ket leal al lezen  
A lem he dra gand he berc'hen ;  
Al lezen-ze an euz eur si  
A zo hanvet al laëronsi.

— Ar chapel guechall ken laouen  
Gant trouz ar gân pe ar beden,  
Zerret !... N'euz ken en-hi eur vrud,  
Hag he c'hloc'h en tour a zo mud !

Jezuz en bev n'e ken en-hi  
Dindan skeuden ven an hosti,  
Na diwar he zrôn ar Verc'hez  
O voushoarzin gant madelez !



War he brec'h azeet, he Mab  
Gand he viz a re he zibab,  
Hag en he skouarn d'ehi a lare :  
« Heman vo eur Jezuz ive. »

Zerret, ar chapel vinniget  
Am oa, bugel, en-hi pedet !...  
Jezuz en-hi na zizkoi ken  
D'he Vam he zanve beleien !! —

Eur vam, nag hi ve evuruz  
Pa vag eur mab evit Jezuz !...  
Mam baour, c'hui a ouelo dourek,  
Biken ho mab na vo belek !

Daoust d'ho c'hoant ha daoust d'hoc'h anken,  
Ho mab na vo belek biken !  
Na zavo ken beleg er vro :  
Ar Vagerez a zo maro !

N'e ken ar stal vel diagent,  
Maro e ar Vagerez zent !...  
Gouelet, Kerne, gouelet, ma bro,  
Mammen ho fe a zo maro !!

Pa vo goueliou hon Fatroned,  
Ar *muzik* pelloc'h na zeui ket...  
Na Superior Pluguerneve  
Da gaërat Pardonioù Kerne !

Kaër a oa, da viz ar bleuniou  
Guelet o tond a vandennou  
Deuz a bep tu AR RE GOSAN  
Ken skanv hag AR RE IAOUANKAN.

Dont a rent d'inori an Ty  
E doa græt en-han ho studi,  
Dont a rent da freskat ho goad  
En Ty a oa vel ty ho zad ;

Dont a rent ol d'en em velet  
Evel breuder ha mignoned  
En Ty a zavaz etre-z-he  
Chaden baduz ar garante.

Vad a re d'he neuze ouspenn  
Guelet ho Henan en ho fenn,  
Hag hen c'hlevet o tisplego  
Oberou an Ty dre ar vro.

Keno... marvad evit bepred,  
Koz ha iaouank, hon mignoned...  
Goueliou na zeuint ken endro,  
Deiou evuruz, kenavo !...





V

Petra a glasker, Kerneviz ?  
— Digristenno hon c'henvroiz.  
Ha vit ma vo zuroc'h an tól,  
A zo diskaret c'hoaz div skól.

Nag a vam vad, a vam gristen  
Ozet e Goarec, e Rostren,  
An euz zavet ho bugale  
Ha miret e doujans Doue.

Nag a æl en-he dibabet  
An euz laret keno d'ar bed  
Evid ober, dre garante,  
Deuz klanvour pe deuz bugale ;


Deuz klanvour en hospitaliou,  
Pe deuz bugale er skoliou.  
Hag e lare ar C'hernevad :  
« D'ar c'horf, d'an ine e rant vad. »

Zerret Siminer ar botred  
Ha skoliou kristen ar merc'hed,  
Me vel e vo c'hoaz hep dale,  
Kerne, truezuz ho toare !

Me vel e vo c'hoaz hep dale,  
Kerne, truezuz ho toare...  
Blawez hag Ored 'n ho goaziou  
Elec'h dour a ruillo daërou !

A ruillo daërou Kerneviz,  
Daërou d'ar fe, d'an honestiz :  
An honestiz, ar fe maro  
Dre ar pevar c'horn deuz ar vro.

Gouelet, Kerne, gouelet, ma bro,  
Mammen ho fe a zo maro !...  
Evid ar vro pebez diouer,  
Maro, ziuoaz, he Siminer !...



## VI

Maro... da viken na n'e ket...  
Vel Jezuz deuz he ve zavet,  
Eun de da zond c'hoaz e savo  
He benn huel a-uz d'ar vro.

C'hoaz e krogo, vel diagent,  
Ar Siminer da heuil he hent  
Evid inor ha mad ar vro,  
Evel e klaske Dom Picot.

Pegait e pado an tri de  
Ma vo hon Siminer er be ?...  
Daoust hag hen a chomo !... henvel  
Ouz *Bon-Repoz*, relek santel ?...

Pa oa dirollet ar Reuz-Vraz,  
War Gerne ive a skoaz ;  
Hag hep true ar Simine  
A oe zammet gand eur prener.

Æl an Ty oa ouz hen difen.  
Chetu perag, ar paour kez den,  
An aour a baëaz he varc'had  
A oa bet ruet gand he voad.

An æl a roaz he gleze  
Evit kastio ar prên-ze...  
Aboue ar goad a zo chomet  
War gleze an æl konnaret.

Doue a zo *just*, ha Doue  
Gemeraz bue vit bue,  
Rak : keit ha lac'ho an nissan  
E lemel he vir digant-han !

— Mar e zemplet Pluguerneve,  
Mar n'hall ket 'n em zifen hirie ;  
Doue zo bepred he berc'hen,  
He æl zo c'hoaz ouz hen difen.

Lagad ma fe dre an amzer  
Hen guel a-uz d'ar Siminer,  
Hag hen konnar 'n he zaoulagad,  
En he zorn he gleze ru-goad !

Eun de da zond c'hoaz e savo  
He benn huel a-uz d'ar vro...  
Ha Kerne a rai goueliou kaër  
Pa zigoro he Siminer.

.....  
Da c'hortoz, ni ol dud Kerne,  
Da Superior Pluguerneve  
Ni lar hag a lar a-neve  
Hon doujans hag hon c'harante.

Evid he Siminer karet  
Poaniou grevuz an euz euret...  
Zant Briak hen dic'h lac'haro,  
Jezuz en Env hen digollo.

.....

Beajour mad, c'hui a dremen  
O vond deuz an eil ker d'eben  
Gand an hent praz pe ar c'hârr-tân,  
Ganac'h eur zalud a c'houlân,

Eur zalud d'an Ty dilezet,  
Eur zonz war ar pezh e ma bet...  
Breman eur zeblant, na n'e ken !  
Vit ma vevo c'hoaz, eur beden.

*Turzunel Kerne.*

### Imprimatur.

Brioci, die 22<sup>a</sup> februarii 1909.

Y.-M. LE PENNEC,  
*Vic. gen.*



SAINT-BRIEUC  
IMPRIMERIE RENÉ PRUD'HOMME  
MAI 1909

